

Frustumad Pennwern : dornskrid 90

## 106. AR PLAC'HIK SEIZ VLAZ

(follennoù 60-62)

Mar plich ganec'h e selloët  
 eur verz zo nevez komposet  
 Deur plac'hik seiz vlaz e zeo gred  
 a zo e mam divarnezzi marvet.

e zad a voa eur meffcher  
 eur feneant, eur butuner  
 a veze pel an noz pa deue d'ar ger.

Ag hi eun dervez doc'h al loar skler  
 Da kerc'het e zad da zond d'ar ger.

Pa erruas en tall an ostaliri  
 e fedas da vond ebars an ti  
 e chonjal galloud e mezvi.

Ma ioulc'h bane a evet bane  
 Va zad diganeoc'h na evin-me  
 Va zad diganeoc'h na evin ked  
 Va zad ganen d'ar ger e deuffet,

Pa voant e vond gant an hent moan  
 e lec'h ne voa den nemet-ho ho unan  
 e zad a mond ag e fede :  
 "va merc'h da zond er park ganen  
 e lec'h na voëzo den nemet Doue".

- "Va zad, ganeoc'h er park na din ket  
 Va zad, evid kometti eur seurt pehet.

- Ma na konsentet d'ar pehet  
 Me a kasso ractal da klasq da vouet.

- Goël eo ganen mond da klasq va bouet  
 evid kometti ar sort pehet.

Doc'h e zad pa eo dispartiet  
 ter goëch d'an douar eo bed simplet :  
 - Jesus a Mari va sikouret.

- 62 -

Ahane eo bed sortiet  
e kichen eun ti eo erruet,  
en tam bara e deus goulenet.

- en anon Doue eun tam bara  
pe gant an naon e fatigan.

Ar c'hreg en deus dezi respontet :  
- C'houi a zo iacuank da c'honid o bouet.

Ahane eo bed sortiet  
en eur park e zeo bet pignet  
en esper kaouet eur c'hreunen  
a raje de halon souten.

Kement me deveus baleed  
greunen e bed ne deveus kaved.

er c'har:s eur gouen e harruet.  
er c'harss eur gouent e harruas  
goulen kovez eni a raz,  
ma raje e gomunion gentan  
a bars mond doc'h a buez ar bed man.

Pa voad e reiñ deñ ar binijen  
Disken ar Verhez en he kichen.

- Da petra ma roit-tu pinijen  
Da eun ell a zo gwisket en guen.  
ounez a ia gane d'am zi  
C'houi a chomo en ho hini.

Ar c'hreg en devoa hi refuset  
A lec'h ma voa bed e houlen bouet  
hi ag e oll voeien a zo losket  
eb goled na tan na moged.

~~~~~

Mari Bozeg, 18 Févr. 1851

~~~~~